

# AR BROTESTANTET ENN HON BRO

---

## WAR EUNN TON DANSAL

---

Protestantet bastard, divez ha didrue,  
Kollet gant-he ho fe, nac'het lezen Doue,  
A zeu da Lannuon gant kanaouenno fall.  
Er bourko, er c'herrio, ho lezer da grial.

Gret ho devez eur zon enep hon beleien,  
Pere a zo karet hag a vo da viken,  
Balamour n'hallont ket labourat vit netra.  
Allaz ! vel ann dud all, renkont dibri bara.

Ugent vloaz ver er skol, rog bean beleg mad,  
Hag arabad vo c'hoaz gonid boued ha dillad ? ...  
Ar ministr protestant neuz groeg ha bugale,  
A labour vit netra, hag a zastu m leve.

War he lerc'h vo kavet douar, aour hag arc'hant.  
Penaved hon ine, kalz vije protestant ;  
N'en deuz mann da ober, ha paeet mad ec'h e,  
Da govez ann dud klanv, sav ket euz he wele.

Ar beleg katolik zo er govision,  
O kovez, o kelen, rei konsolasion,  
A zikour ann intanvez gant kalz a vugale,  
A ro ann aluzen da noz ha da veure.

Bleizi zo enn hon zouez, war-n-he kroc'hen denved.  
Ar re wellan ann-he a dra-zur zo *bouc'het*.  
Pa ver hep konsianz, c'heller ober pep tra,  
Ha zodi koz groac'het, wit-he gwerza, prena.

Unan ann-he c'hrouie gand neud guen he vrago,  
Vid na vije, gwechal, gwelet he lieno ;  
Mar zeo breman pinvik, mar neuz kalz a leve,  
Dlefe lezel e peuc'h zervijerien Doue.

N'euz ket *unan dre vil* diout-he er vro-man,  
Na fulen na greskont, kaër ho devezu kanan.  
Ma vije c'hoaz hennez protestant dre natur,  
Ze vije mad, evel... koc'h ki euz poac'hadur !

E traou he zon lennet, ha c'houi gavo *Tao*.  
Mar goc'h eunn tamm begek, e trofet ann hano ;  
Ha mar zeo mad ho fri, hastet redek ar c'had,  
Vit gallout he zapout, rog ma ielo er *C'hoat*.

Breman pa m'euz laret d'hec'h ar pez a zonjan,  
Roïn d'hec'h eunn ali, unan ar re wellan.  
Tre Doue ha Satan, a zo brezel hirie ;  
M'hoc'h euz c'hoant da c'honit, deut da goste Doue.

Gwelet a ran bemde he zorn holl-gallouduz  
O skei, a zeo-a glei, o rei tollio spontuz.  
Skei ra a zeo-a glei, ha diswinta potret,  
Grede ho doa affer euz eunn Doue kousket.

Me lar d'ar protestant : « M'hoc'h euz relijion,  
» Distroet, mar keret, d'ann kini zo gwirion ;  
» Ann dud vraz a *Vro zaoz*, a zeu a vandenno,  
» D'ar gwir relijion a gondou d'ann Envo.

» N'halla ket laret vad euz ho relijion ;  
» Drogfenn ket ma hini, vid kat eur million.  
» Pidi a ran Doue, da noz ha da veure,  
» Ma teuio d'am harpa evid difen ma fe.

» Rag fe ho tado koz eo ma hini ive,  
» A zo mad da vevan ha da vervel goude.  
» Eunn de, c'houi a greno dirag komz ar *Barner*,  
» Ha me drido joauz, me paour kez *masoner*.

» Penaved m'ho karan, na larjenn d'hec'h netra.  
» True am euz ouz-hoc'h, c'hoant am euz da wela.  
» Troet hoc'h, ma mignon, diwar al linen vad.  
» Mar teurveet distrei, n'hoc'h ket re diwead. »

EUR C'HOZ VASONER.